

# CANTIC

EN ENOR DA

## SANT MARTIN

Escop Tours

**Patron parrez Sant Martin-Montroulez**

Var ton ar : *Pange solemnes*  
pe unan eus toniou an : *Iste confessor.*

Celebromp hirio gant laouenediguez  
Triumph sant Martin, patron bras or parrez,  
Curunet a c'hloar e palez eternal  
An Drindet santel.

Pigu a lavaro buez ha vertusiu  
Or patron caret, ha pebez buzardou  
A reas gueichall, dre zaouarn san Martin,  
On Salver divin.

D'an oad a zec vloaz, bras meurbed oa ar c'hoant  
En doa da receo dour sac'r ar vadisiant,  
Rac ganet e oa eus a guerent paien,  
Stard er fals creden.

Truezus meurbed en andret ar beorien,  
C'hoas soudard iaouanc, aroc beza christen,  
E troc'h he van'el evit golo diou scoaz  
Eur paour kez en noaz.

Eur veich badezet, sant Martin a lavar  
Kenavo d'ar bed, d'he vadou ha d'he c'hloar,  
Ha divar neuze, da scu'er e kemeras  
Jesus gant he groas.

Douss evel eua oan, chast, humbl ha patient,  
Carguet, a ent all, ha furnez, a skiant,  
E tennas varna, betec er solitud,  
    Dioulazat an dud.

Choazet da Escop, e savas eur gouënt,  
Ha gant ar venac'h (edont pevar ugent),  
Ec'h en em roaz, eno, corf hag ene  
    Da servij Doue.

Noz-deiz he pede ac e rë pinijen,  
E scuille daëlou evit ar bec'herrien,  
Ac e tiskenne tan ar gontrition  
    Var sclass ho c'halon.

Ac a eneou da Zoue gounezet !  
Ac ar glanvourien ganta bet pareet !  
Eus pep corn a Frans e teue hon tud coz  
    Da g'asc he vennoz.

Galloud en devoa var ar maro, soken,  
Ha betec teir gueich, eus he c'hrabanou ien,  
Ar Sant, o pedi caloneg ha gant feiz,  
    A dennas he freiz.

Nan, nac en or bro, nac e bro all ebet.  
N'eus ket bet eur sant muioc'h anavezet,  
Ini n'en deus grêt kement a vurzudou  
    Ac a viraclou.

En a gonsacras, dre urs Cador sant Per,  
An Escop ken mad, sant Corentin Quemper,  
Ho daou oant kerent, ho daou par d'an Æ'ez  
    Dre ho santelez,

Pa glanvas ar Sant, he eskibien caret :  
« Tad ker, emezo, o ! n'on dilezet ket,  
« Guelit ho sailla dija var ho tenved  
    « Bleizi counaret. »



Ac en da Zoue a rê ar beden-ma :  
« M'ar d'on necesser d'ho pobl, c'hoaz emeza,  
« Me 'labouro c'hoaz, ma roit d'in buez,  
« Grit ho polontez. »

O ! den burzudus, d'al labour trec'h ato,  
Eb galloud beza trec'het gant ar maro,  
Caout aon da vervel n'ouie ket petra oa,  
Na refus beva.

Ractal ma varvas, mouesiou melodius  
A ganas en ær cantikou dudius ;  
An Ælez santel a oa deut da guerc'had  
Ene caer on tad.

O ! patron santel, sant Martin benniguet,  
Tad carantezuz, er bed oll ken brudet,  
C'houi a zo brema en tu deo da Jesus,  
Var eun tron skedus.

Ah ! taulit varnomp eur sell a drugarez,  
Varnomp, bugale sant Martin, ho parrez,  
Grit ma tiskenno glizen douss an Envou  
Var on c'halonou.

Pedit, sant Martin, pedit evit ar Frans,  
Obtenit dezi sicour ac assistans,  
Ma c'hello, erfin, trec'hi enebourien,  
Feiz ar bobl christen.

Da Iliz Doue, tud fall a ra brezel,  
O ! pedit Jesus da rei ners d'he Vikel,  
Ha d'asten bepred he vrec'h oll-galloudec  
Var Leon trizee.

Grit ma zaimp, eun deiz, oll ganec'h da repos,  
Da velet Doue e gloar ar Baradoz,  
Elec'h ma cavimp, gant ar guir evrusted,  
Peb seurt joaiusted.

Ni 'velb necze, Jesus hag ar Verc'hez,  
Ac en dro dezo, ar Sænt ac an Alez,  
Beuzet en eur mor a blijadurezou  
Ac a zelissou.

Gloar d'an Drindet saer : Tad, Mab ha Speret Glån  
Ne reont, a vicoaz, ho zri, nemet unan,  
A c'houarn ar bed, ac a ren en Envour  
Hed ar c'hanvejou.

AMEN.

V. Pedit evidomp sant Martin.

R. Kvit ma vezimp rentet dign eus a bromessaou  
Jesus-Christ.

CRESON — Doue, c'hui ac a vel ne ellomp, e guis  
ebet, en em souten dre on nerz on unan, accordit  
deomp, en ho trugarez, ma vezimp dre intercession ho  
servicher sant Martin, Confessour ac Escop, kennerset  
eneb kement tra a ello stourm oazomp er bed-ma. Bre  
on Autrou Jesus-Christ, etc.

Quimper, 26 Octobre 1892,

IMPRIMATUR :

E. FLEITER,

VIC. CAP.

---

Morlaix, imp. LANOË.